

89/ 682 LET
E. AR MOAL

Bilez hag e vestr

pez=c'hoari farsus
e daou arvest

Embannet
gant « Feiz ha Breiz »
14, Streat ar C'hastell
BREST
(Breiz).

Bilez hag e Vestr

Pezig-c'hoari en II arvest

ROLL AR C'HOARIERIEN :

JAKEZ KOZ, 60 vlâ.
BILEZ, mevel, 34 vlâ.
JOBIG, niz Jakez koz, 12 vlâ.

*Ar pezh a dremen en eun ti war ar mêz.
Bilez a vo tort, strujet ha gwisket fall.*


ARVEST I

KENTAN DIVIZ

BILEZ, e-unan. Gwech an amzer, ec'h a da zellet da
doull an nor.

Pa oan deut aman da vevel, an hini koz ac'han a c'houl-
las diganin petra a ouien ober. Ha me lâret d'ean gwel-
lan tra a ouien ober a oa laerez, met laerez dre finese, evel
eun den savet mat, laerez gant onestiz. Ha setu hon doa
grêt marc'had evellen. Bean am ije ma boed ha ma dilhad,
'vit ma labour; pae ebet, avat, nemet kement a c'halljen
da dapout, dre finese.

Pemp miz tremen 'zo abaoe: poan am eus bet o kaout
ma boued, muioc'h a boan c'hoaz o kaout ma dilhad, met



o lakaat ma dorn war gwenneien ma zonton n'am eus ket bet a boan: betek breman, gant ma holl fineseou, n'am eus paket nétra.

Deut eo ha ne ra ken nemet ober goap ac'hanon. Beb eur ha bep momed, pan arru ganin: « C'hanta! petra 'teus laeret d'in hirie? »

Vit lâret ar wirione, ne dec'h ket diwar ma choug; bepred e ve e lagad hag e skouarn war evez ouz kement a ran hag a lâran. Goude labourat 'vel eun aneval, n'am bevez na dilhad da c'holo ma c'hroc'hen, na boued da gargan ma c'hof.

O sellet ouz eur bragou 'zo gantan war goubl e vrec'h.

Ya, setu aze gwellañ 'm eus da lakaat da vont disul d'ar pardon! C'houi ra eur bragou gant an dra-ze? Seiz toull kontet mat a zo ennan! Ha seiz pesel! N'eo ken henvel ouz nétra! Ouz petra, me 'c'houlenn ganac'h, 'vo henvel an hini a wisko anean!

Eur vioc'h hon devoa: an de all, e kasas ac'hanon da werzan anei, war digare oa re ger da zerc'hel, ha breman ec'h omp heb aman na lêz. 'C'han da begoulz? Prenet e vo, emean, pa ne vint ket re ger! Met bep sun e vent kavet re ger gant ma zonton.

Ah! Setu aze eun dostenn! Setu aze eur c'hrug-sec'h!

Setu aze eur bizied ar gernez!

Arc'hant en deus abaoe amzer Matuzalem, aour hag arc'hant! Ah! Heman n'en deus ket kaset e aour d'ar brezel! Chomet int sioul er gêr, ha breman eman o vernian paper warnê!

Ha lâret n'o ket 'vit kaout krog e lost eur liard hepken!!

N'eus forz, n'in ket ac'han, na pa renkfen bale noaz ha diarc'hen, ken am o distaget eur gwenneg bennak diouz ar c'hoz skraper koz-man!

Hirie e teu e vêrer bras da bae anean: mil skoed 'n eun dornad! Ma 'm befe krog er re-ze! Danzeet em eus eun dro. Gwelet e vo 'benn e-berr pesort fin a vo d'imp.

Daoust pelec'h eman tonton Jakez?

Mont a ra ermêz.

DIVIZ II

TONTON JAKEZ, o tont sioulik. Sellet a rei ive ermêz a greiz kôzeal.

Ha! ha! ha! ha! Aman 'man tonton Jakez!... Ha! ha! ha! ha! Klasket en deus ober eun dro gamm da bakan e donton! Ah! kanfard!... Met tonton Jakez 'n eus bepred skouarn tano ha lagad lemm, ha, neb aon, e spered n'eo ket re dogn ive! Ah! kampinod! Neb aon! Arru eo hir e zent; kregi start a reio, mar gell. Mil skoed! Neb aon! Daoust petra eo an dra-ze? Lakomp e klevin an dra-ze gantan! Arru eo ar pôtr gant e vragou!

DIVIZ III

TONTON JAKEZ, BILEZ

BILEZ

Ouz ho klask e oan, ma zonton!

TONTON JAKEZ

Me oa o klask ac'hanout ive, neb aon! Petra peus laeret d'in hirio?

BILEZ

Na rit ket a c'hoap! Gôût awalc'h a rit c'houi n'oc'h ket eun den hag a ve gellet da laerez.

TONTON JAKEZ

Me grede koulskoude, diouz da glevet, e oas eur pôtr fin?

BILEZ

Bet on, met n'on ket ken abaoe 'm eus kavet finoc'h evidon.

TONTON JAKEZ

Finoc'h evidout?

BILEZ

Ya; ma vjie an holl henvel ouzoc'h, n'hallfe laer ebet bevan. Me renko klask eur vicher all.

TONTON JAKEZ

Koulskoude, me wel e teuez da veza tort, hag an dud tort, emezo, a zo pôtre dilu!

BILEZ, *o tiskouez e dort.*

Ya, setu aze kement am eus goneet en ho servij!
Pec'hed ho peus oc'h ober goap; rak ma teuan tort, eo en abeg ma ne roit ket d'in ar pezh zo dleet.

TONTON JAKEZ

Ne roan ket d'it ar pezh 'zo dleet? Daoust ha ne 'z pevez ket boued ha dilhad?

BILEZ, *o c'hoarzin trenk.*

Boued? Pesort boued? Dilhad? Ha! ha! ha! Setu aze, da vihanan, eur pezh dilhad, gwella hini am eus! Diskouezet aman d'in ho piz.

TONTON JAKEZ

Va biz? D'ober petra?

BILEZ, *o lakaat anean en toullou ar bragou.*

Unan! Daou! Tri! Pevar!...

TONTON JAKEZ, *o jachan e zorn.*

Ta! ta! ta! ta!

BILEZ

Gwell vije ganac'h kontan peziou ugent real! Ha me ive! Met me n'hallan kontan nemet ar pezh am eus, da lâret eo, an toullou 'zo 'n em bragou!

TONTON JAKEZ, *feuket.*

Toullou? N'eo ket toullou eo a zo! Ha mar 'z eus toullou,

N'eo ket te eo kemener an ourl
A lak an tamm e kichen an toull,

m'oarvat?

BILEZ

Ya da! peselia! Neuze 'ne vo ken outan nemet eur pesel penn-da-benn... Eur bragou neve a renkan da gaout!

TONTON JAKEZ

Eur bragou neve? Te a ra eur bragou fall gant hennez!
Me roio d'it, mar karez, kleo 'ta! unan eus va re goz...

BILEZ

Hag a zo c'hoaz falloc'h 'vit heman! Mirit ho pilhou, en han' Doue!... Ma n'am bevez ket eur bragou neve, ne reoc'h ket a c'hoap ac'hanon pelloc'h!

Eur bragou seiz toull ha seiz pesel a gavin forz pelec'h 'vit ma gêpr!

Mont ra 'trezek an nor.

TONTON JAKEZ, *goapaüs.*

N'ez ket pelloc'h! Aman 'z eus ouspenn gwerz eur bragou; met ret eo o gonit! Fae eo ganin rei boued, dilhad hag arc'hant d'eur genaoueg!

BILEZ, *droug ennan.*

Forz pegen genaouek oun, bepred oun barrek d'ober skol d'ac'h!

TONTON JAKEZ, *goapaüs.*

Gwelomp!

BILEZ

Setu aze eur bragou...

TONTON JAKEZ

Eur bragou mat!

BILEZ

Lâret d'in 'ta petra lennit warnan?

TONTON JAKEZ

Netra 'bet, pa n'eus netra skrivet!

BILEZ

Eo! Sellit ervat...

TONTON JAKEZ

Ne welan seurt!

BILEZ

Red eo d'in 'ta ober skol d'ac'h... Sellet mat! Aman eo toull! Aman n'eo ket toull! Aman eo toull! Aman n'eo ket toull! Aman eo toull!...

TONTON JAKEZ

Me wel an dra-ze a-walc'h!

BILEZ

C'hanta? Bremaïk ne welec'h ket? Anzav a rankit breman eo toull ma bragou: Aman eo toull!...

TONTON JAKEZ

Aman n'eo ket toull!

Derc'hel a reont evelse.

Ta! ta! Me ' gaso da dorz d'it d'ar gêr! Da vragou n'eo ket toull! Ne peus ket kaeroc'h da gontan d'in?

BILEZ

Gwelomp hag hen ne vourdin ket ac'hanoc'h!...

O 'n em zonjal.

Setu aman petra 'm oa grêt eur wech pa oan o teski ma micher... e ti ma eontr miliner.

Eun devez e weljomp mevel eur c'higer o tremen ouz toull ar porz, gantan war e ziouskoa eul leue a oa o paouez prenan. Ha ma eontr ha lâret d'in: gouest out da laerez al leue-ze? — Ya, emeon. — Kerz 'ta ha digas anean endro! » Vit lâret d'ac'h pep tra evel ma oa, tôle am oa plê e oa eur c'hoz re votou koad e treid ar mevel. Ha breman, petra ho pije grêt c'houi?

TONTON JAKEZ

Ne welan ket kaer dre benôs e c'halles laerez al leue war zigare e oa toull botou ar c'higer.

BILEZ

... Me ' dapas eur botou koad neve-flamm a oa o sec'han e korn ar chiminal ha da droc'han berr 'vit arruout 'rôk ar c'higer en eur valaneg en devoa da dreuzi. Er penn tostan, dre lec'h mac'h ee ebarz, me lezas eur votez koad; eben a gasis ganin hag a bôzis er wenojenn, er penn-all d'ar park. Ha breman, c'houi ' oar petra c'hoarveas?

TONTON JAKEZ

Heu! Eun divinadenn eo da gont!

BILEZ

....Ar mevel a dôlas plê d'ar votez kentan. Hag hen ha chom 'n e zav: « Sell aze, emean, hag a rafe ma jeu, ma vije bet he farez ganti. Met petra rin-me gant eur votez hepken? » Hag e lezas anei eno. Arru er penn all d'ar valaneg, e kavas ar votez all, ar barez: « Dal! emean, eun den a chans oun 'velkent! » Hag hen ha teurel e leue war ar c'hlaenn ha mont da gerc'hat ar votez gentan. Me ne oan ket a-bell, hag a-benn ma tizroas ar mevel!...

TONTON JAKEZ

Ah! Kampinod!... E oas skampet gant al leue!

BILEZ

Deut eo ganac'h, ma zonton!... An de-ze e ris ma ran. D'abarde, setu mevel ar c'higer o tremen adarre gant eul leue all: « Hennez am bo c'hoaz! emon-me. » Penôs ho pije grêt, an dro-man, ma zonton?

TONTON JAKEZ

Fe, neb aoun, te 'c'houlenn traou ciganin!...

BILEZ

...Mont a ris da guzat d'ar valaneg. Pa dremenas ar c'higer, war e giz, en em lakis da vlejal evel eul leue: « Ah! loenig paour! emean, aze emaout? » Hag e tizamas eus al leue oa gantan war e choug, 'vit mont da gerc'hat an hini 'oa kollet. Me, e keit-se...

TONTON JAKEZ

Ah! louarn! Te grogas war egile!

BILEZ, *goapaüs.*

Deut eo ganac'h adarre!

TONTON JAKEZ

Ya, met warnon-me e vankez!

BILEZ

Gwir eo! Warnoc'h n'oun evit kaout krog ebet! C'hoariet am eus troiou evelse, n'ouzon ket ped. Met, 'm eus aon, eo achu ganin!...

Eun dra hepken a c'houllan diganac'h: pa vin maro, rak gwelet a rit pegen kasti oun ha pegen dinerz, hag an tort-ze war ma c'hein ne ra bemde nemet kreski, bet ar vadelez da lakat pedi Doue evidon.

TONTON JAKEZ

Heu! heu! D'an hospital eo d'it mont, mar dout klanv! Me, neb aon, n'on dleour d'it nemet a voued hag a zillhad!

BILEZ, *a goste.*

Nann, nann, ma c'hroc'henn ne chomo ket ganit!

TONTON JAKEZ

Petra c'hrozmolez etre da zent?

BILEZ, *trist.*

Oun eun den dilezet, paour kez ma 'z oun.

TONTON JAKEZ, *o vont ermêz.*

Alo! alo! na ouelez ket! Me rei lakaat ober d'it eur bragou neve!

DIVIZ IV

BILEZ a ya da zellet ermêz a bep tu.

Aet eo endro! Eur bragou neve a laran-me ive! Kaeroc'h
am bo mar deo gwir eo me eo Bilez!

Mont a ra da wignal d'unan bennak.

Jobig! Deus aman!

DIVIZ V

BILEZ, JOBIG

Kleo, ma fôtr, pegement ar zizun az pevez digant da
contr d'ober da bôtr yaouank?

JOBIG

Pemp gwenneg, bep de kentan 'r blâ!

BILEZ

Eun tamm arc'hant a zo da c'honit evidout, mar karez;
— sell, leiz da voned a wenneien!

JOBIG, bras e zaoulagad.

Leiz ma boned?!?!

BILEZ

E-berr, raktal goude ma vo bet mêrer bras da contr o
paeen, pa glevi da contr ha me aman o kêzeal, deus da
doull an nor ha huch diou wech a bouez da benn: « Krog
eo an tân er vereri! »

JOBIG

N'am bo 'met ze d'ober?

BILEZ

Netra ken.

JOBIG

Hag am bo arc'hant leiz ma boned?

Goustadik.

Eus arc'hant ma contr?

BILEZ

Leiz da voned! Met dalc'h sonj ha tav!! Grik war ze!

JOBIG, o vont ermêz.

« Krog eo an tan er vèreri! » N'ankounac'hain ket.

BILEZ, goude sellet a bep tu.

Stignet eo ar pech. Ha breman, 'vel ar chaseer, gorto-
zomp! (*O skei war e dort*). N'eo ket lâret e c'her diwean
c'hoaz gant Bilez!

FIN AN ARVEST KENTAN

ARVEST 11

DIVIZ I

TONTON JAKEZ, o tont en ti hag o komz diwar an
treujou ouz unan bennak hag a zo er mēz.

Dampasion! Leret-hu? Daoust ha n'on ket mestr d'am
zra! Pa lâran d'ac'h n'hallan ket, n'hallan ket!... — Ha
gwelet peus biskoaz? Me goll, me, ya, me, tri mil lur
ar blâ ganac'h... abaoe ar brezel — Ya! Ya! Ho mēteri
'zo tri mil lur re varc'hadmat! — Tri mil lur! ya! neb
aon! Gallout a rit bean e zonz e kresko ho kouel-mikēlez
kentan tro! 3.000 lur ar blâ a chom 'n ho kodell hag
a dleje bean 'n em hini!... E teuit c'hoaz da c'houlen si-
kour diganin? Oh! paour kēz! (*War eun tōn gouelan*).
Me 'n hini 'renko goulou prestik sikour digant ma mē-
rerien! Eur vuoc'h am oa, eun tammik penn-buoc'h, a
roe d'in lēz hag amann; c'hanta! renket em eus gwer-
zan anei ha breman, me 'zebr bara sec'h!... Ya! neb aon!
Bara sec'h!! Ha c'houi, dibri a rit bara sec'h? Rit ket,
laouen!... Kenavo! — Kenavo 'ta! kenavo!... Ya! ya!
Kentoc'h lezel an « ôtrou » heb e baeen!... *O tont en ti.*

Birvi ra ma bannac'h gwad, neb aon!... Ya, birvi 'ra!
Red vo d'in 'benn ar fin rei ma zammou eskern d'ē da
grignat! Forz pegen bihan ve, o c'hont, bepred e klem-
mont!... Eun tamm rabad, pe eun tamm zikour, pe eun
tamm gwerz-putun, pe eun tamm sae d'an hini bihan, eun
dra bennak a jachont bepred! Tagerien! Ma fe! Betek
ho kwad a zunfent d'ac'h!... Neb aon, ya, met ganin n'eer
ket a-strons! A drugare Doue hag ar Werc'hez, aman zo
eun tamm harz (*o skei war e vruched*).

Oh! ma zamm arc'hant! Aze emaout!...

(*O vont da zellet da doull an nor*).

Red eo d'in kontan anē c'hoaz, betegout na ven bet
tapet! Hum!

(*Dispakan 'ra eur yalc'h ha tennan bilhejou*).

Kant lur! 200! 300!... 'Meus aon e klevan trouz! Ara-
bad e vefe ar Bilez-ze wardro!... Oh! ne chomint ket
aman pelloc'h eget varc'hoaz!... Varc'hoaz ez aint da-
ved ar re all... Gwenneg ebet 'n em zi, nemet just ha
just ar pezh 'zo red. Evelse ne vin ket laeret na ne vin
ket!

Aze, en godell ma forpant, aze e chomoc'h fenoz, ma
gwenneien bihan; aze e kouskoc'h c'han da warc'hoaz,
ma gwenneien karet! (*O welet Jobig o tremen*).

Jobig!! Jobig!!! Aman raktal!!!!

DIVIZ II

TONTON JAKEZ, JOBIG

TONTON JAKEZ

Penôs, e leret-hu, ma c'honsort, gwall dizoursi ho ka-
van! Petra rit dre aze?... Ha petra eo ar boned-ze a we-
lan ganac'h hag a gouez war ho tiouskouarn?

JOBIG, *pof*.

Me 'oa o sellet...

TONTON JAKEZ

Peus ezomm ebet da chom da c'houren ho fri e toull
ar porz! Ezomm ebet n'ho peus da c'houzout piou a dre-
meno!... N'eo ket aze eman ho labour, saprr!

JOBIG

Ya, ma eontr, met...

TONTON JAKEZ

Met petra?

JOBIG

Gwelet 'zo bet eul laer o tremen er bourk 'vit ar beure
ha hennez a lak an tân en tier... Tonton Bonomik a zo êt
war e lerc'h gant ar « chasse-gueux ».

TONTON JAKEZ

Piou, e leret-hu, en eus kontet ze d'ac'h?

JOBIG

Kemener ar bourg o vont da gas dilhad neve d'ar gêr.

TONTON JAKEZ

Ah! ah! (A goste). Mar deo gwir, red eo bean war
evez! (Gervel a ra).

Bilez! Bilez!! Bilez!!!
Huch 'ta war Bilez!

(Da Jobig).

JOBIG, e zaou zorn endro d'e c'henou, e toull an nor.

Bilez lôôô!

BILEZ, 'vel eus a-bell.

Hôôô!

DIVIZ III

Ar memez re, BILEZ

BILEZ

Petra an diaoul-skorn a c'hoarvez ganac'h ho taou?

TONTON JAKEZ

Petra lâr ar c'hanfard-man, zo bet gwelet eul laer o
tremen er bourk hag a c'houez an tân en tiez?

BILEZ

N'am eus ket klevet ze...

TONTON JAKEZ

C'hanta! c'hanta!... Gwelet a rit, ar marmouz fall! Gant
e c'hevier!

BILEZ

N'em eus ket klevet ze, met gwelet em eus breman sou-
den pennher an Taleg o tistagan e gi hag o vont d'ar
red trezek ar c'hoad, eur forc'h dir gantan en eun dorn
hag e gi ouz an dorn all.

(Mont a ra er mêz).

DIVIZ IV

TONTON JAKEZ, JOBIG

TONTON JAKEZ, o kravignat e jod.

Red eo e vefe gwir, neuze! (Da Jobig) Chilaou, kerz ha
dalc'h d'ober an dro d'an ti ha ma welez eun diaveziad
bennak wardro, deus kerkent da lâret d'in!

JOBIG, o vont er mêz.

Ya, ma zonton!

DIVIZ V

TONTON JAKEZ, e-unan.

Ne glever ken komz nemet eus a laeron! Pesort tud
'ta 'zo war an douar en eur hirio! Ne zonjont nemet
'barz an arc'hant!... Ha ma re, da vihanan?... 'Maent aze
bepred! N'am eus ket gallet ober ma c'hont breman sou-
den, war ma fouez...
(O sellet ouz an nor).

Et pep hini war e du...

(Kontan ha sellet 'ra ar bilhejou).

Kant!... Pemp kant!... Pemp kant all!... Ha heman 'zo mil! Braoat eo eun tamm paper evelse, han?

(Bilez a zo deut en ti goustadik hag en em gav drek kein T. Jakez).

DIVIZ VI

TONTON JAKEZ, BILEZ

BILEZ, *oc'h astenn e zorn.*

Hennez a vo mat d'in da benselia ma bragou!

TONTON JAKEZ, *o plegan e choug en eur zerri prim e arc'hant.*

Forz ma buhe! — Ah! te a zo aze! Ha! ha! Manket out!...

BILEZ

Oh! ma zonton! Me ne lampan ket war an dud! Me a gomz brao outo, hag evelse ven bepred chilaouet.

TONTON JAKEZ, *o peurdastum e arc'hant, e tu all d'an dôl.*

E oas adarre o klask an tu warnon, han, lakipot?

BILEZ

Oan ket da! Deut e oan da lâret d'ac'h eo bet gwelet al laer tost aman.

TONTON JAKEZ, *garo.*

C'hanta! C'hanta! Tôl plê outan, ha n'eo ket ouz ma arc'hant! Me 'zo barrek, goût a rez, da ziwall ma arc'hant!

BILEZ

Ya da, goût a-walc'h a ran... Ha n'eus tamm ebet evidon 'barz ar bern bras-ze?

TONTON JAKEZ, *e tu all d'an dôl, e zorn war e arc'hant, a hej e benn.*

Nann!

BILEZ, *o c'hoarzin.*

Red eo ho pefe gwall aon ouzin, memez tra, pa ne gredit ket, dirazon, distagan ho torn diwar hoc'h arc'hant hag hen en ho kodell!...

TONTON JAKEZ, *o lemmel e zorn.*

Me? aon? Oh! aon ebet, avat, ma fôtr! N'eo ket hirio c'hoaz e tapi krog e lost ma gwenneien!

BILEZ

Ne lâran man war ze! met ar pezh a lâran eo ne gredfec'h ket pôz hoc'h arc'hant aze, war greiz an dôl, keit ma vin me aman!... Pôz anê eur vunutenn hepken!...

TONTON JAKEZ

Alo 'ta! Poufer! Pou... ou... fer!

BILEZ

Gwelomp ze 'ta!

TONTON JAKEZ

N'eman ket ma fenn gant c'hoariellou!

BILEZ

Krenan rit! Ez an da vont kuit! Aon ho peus ne laerfen hoc'h arc'hant d'ac'h en eur zellet oute. Ha! ha! ha!
(C'hoarzin goap a ra).

TONTON JAKEZ

Mar n'eus nemet ar gwel anê 'vit ober plijadur d'it, ma fôtr, sell aze! (*O tiskouez e arc'hant*). Gant se ec'h akuifi!

BILEZ

Ya da! Memez tra, ne lezoc'h ket anê aze war an dôl, keit ma vefen o kontan ugent, me aman, sellit e korn an ti, ha c'houi aze, 'n o c'hichen!

TONTON JAKEZ

Deus 'ta, gant da siklezonou!

BILEZ

Ha c'houi, gant ho tigareziou!

TONTON JAKEZ

Neb aon, ma fôtr, me n'em eus aon ebet ouzit!

BILEZ

Nann, keit 'man ho torn war ho kwenneien!

TONTON JAKEZ

Sell int aze! N'emaint ket war an dôl??

BILEZ

Tennit breman ho torn diwarne 'ta! — Evelse! Ha mar doc'h barrek da ziwall hoc'h arc'hant, evel a lârit, bezit war evez. Ec'h an da gontan!...

TONTON JAKEZ

C'hoant ober da damm zorser ez peus, 'm eus aon? Met biskoaz zorser n'eo deut a-benn da zorsan tonton Jakez... ha ne deuio ket!

BILEZ

Neuze, r'ho peus ezomm ebet da chom keit-se da dermal ganin!

TONTON JAKEZ

Eo, ma fôtr, me ya da lâret d'it perak! Me ne blij ket d'in c'hoari diwar netra! Petra lakez te 'barz ar pod? Me lak mil skoed!

BILEZ

Prestit d'in kemend-all ha me lako ive!

TONTON JAKEZ

Tamm koz lakipot!.. Kleo aman! Mar chom ma arc'hant 'barz ma yalc'h, — evel ma ray! — goude ma 'z pezo kontet ugent, c'hanta, e renki rei d'in pemp blâvez servij vat evit netra! Intentet mat eo! Pemp blâvez servij! Vit man! nemet boued ha dilhad!

(*Bilez a chom da zonjal*).

C'hanta? Respont a ri? Chomet eo da c'henou ganit war nao eur!

BILEZ

Evel a lârit a zo mat! Eur c'hleun ne vez ket savet diouz eun tu hepken. Met c'houi ive, mar kollit, ne lakoc'h klask ebet war hoc'h arc'hant da c'houzout na pelec'h na gant piou vo êt!

(*Tonton Jakez a chom dilavar*).

War bed eur, ma zonton, eo chomet ho kenou?

TONTON JAKEZ

Me 'zo sod! Eus a belec'h e tec'hfe 1.000 skoed alese, hep goût d'in, ha me en o c'hic'hen?

(*O c'hervel*).

Jobig!

(Jobig à deu da doull an nor).

Digas aman ar pouez 40 lur!

JOBIG

Petra? Mont aze hag em bo 40 lur?

TONTON JAKEZ

Chekon! Bouzar out?... Ar pouez 40 lur! Digas aman ar pouez 40 lur!

JOBIG, *souezet maro.*

Ar... pouez... 40 lur?... D'ober... petra?

TONTON JAKEZ

D'ober d'ar zod goulenn ha d'ar fur tevel!

(Jobig a zigas ar pouez 40 lur, hag a ja er mêz).

Tôl evez ouz da laer!

(O lakat ar pouez war e arc'hant).

Gwelet a rez o lost, n'e ket 'ta? Krog a-walc'h 'vit eur pôtr fin evelldout!... Alo, ma fôtr! Kont breman!... Betek kant, mar kerez! Ma tec'h an arc'hant-ze alese, me c'houlenn c'hoaz, war ar marc'had, bean tort evidout!

BILEZ

Keun 'm eus n'eus aman noter ebet da skrivan ho komzou. Talveout reont o fouez aour, hag aon am eus, rak se, na zislânfec'h anê?

Ez omp ganti? Unan!... Daou!... Tri! Pevar! Pemp! C'houec'h!

Ober ra pep seurt sinou en êr gant e zaouarn, huchal awechou a-bouez e benn, awechou all, komz dousik. Tonton Jakez a deu da vean nec'het ha da c'houezan.

TONTON JAKEZ *gant eur vouez raouiet.*

Gortoz! Gortoz! ma sellin!

BILEZ

Ze n'eman ket 'barz ar gont!... N'eus forz, sellit!

TONTON JAKEZ, *goude sellet ha kavout e arc'hant er yalc'h.*

Poù... où... fer!

BILEZ

Gortozet, ma zonton; n'am eus kontet c'hoaz nemet nao!... Dek! Unnek! Daouzek! Trizek!... Heman 'zo eur poent fall!...
(Ober 'ra sinou war dastum).

TONTON JAKEZ, *trubuilhet adarre.*

Gortoz, ma welin!... 'Maint aze!... *(O skei gant e zorn).*
Pemp blâ 'n em zervij 'vit metra! Pemp blâ! Pemp blâ!
Pemp blâ!

BILEZ

Pevarzek! Pemzek! C'houezek! Seitek! Triouec'h! Naontek! Hag...

JOBIG, *a ziavêz.*

Hola! hola! tud aman! Krog eo an tân er vèreril!

TONTON JAKEZ, *o redek ermêz strafuilhet.*

Doae! Doae!

DIVIZ VII

BILEZ, *e unan.*

BILEZ, *o vont d'an arc'hant, o lakaat anê en e dort hag ar pouez war ar yalc'h adarre.*

... Hag ugent!

(Mont a ra da zellet hag e tizro da gorn an ti).

Arru eo war e giz ha prez warnan!... Aman ec'h a da vean breman souden eun tammik diskrapadeg!

DIVIZ VIII

TONTON JAKEZ, BILEZ, JOBIG

BILEZ

Lazet eo an tân?

TONTON JAKEZ

Me ho kigno ez veo!... Re an ti all o lakaat an tan er
forn 'n hini oa (*Da Jobig*) bleupez, glapez !!... Va ar-
c'hant??...

BILEZ

Kontet em eus betek ugent.

TONTON JAKEZ, *o sellet.*

Ah! va zamm arc'hant! Laeret int! (*O tiskouez e zorn
da Vilez*).

BILEZ

Ma eontr, gounezet am eus an tôl!

TONTON JAKEZ

Kef ifern 'zo ac'hanout! Gounezet an tôl! Ya, ar groug
ez peus gounezet! Tapet ' peus va arc'hant keit ma oan
er mêz!...

BILEZ

Daoust ha n'ho poa ket lâret chom aman? Daoust ha
me 'm eus grêt d'ac'h tec'het kuit?

TONTON JAKEZ

Aman d'in ma arc'hant! (*Furchal ha hijan ra anean*).
Tort milliget!

BILEZ

Diwallit na freuzfec'h d'in ma dilhad! War ho kont
emaent!

TONTON JAKEZ

Pelec'h 'peus laket va arc'hant??...

BILEZ

Ze ne zell ket ouzoc'h! An arc'hant-ze n'int ket d'ac'h
ken!

TONTON JAKEZ

Oh!...

BILEZ

C'hanta, bezit den d'ho ker, war eur poent, da viha-
nan, hag ho po anê!

Lâret ho peus breman souden ne lakjec'h ket a glask
warlerc'h, hag, ouspenn, ho peus lavaret evellen: « Ma
tec'h an arc'hant-ze alese, me c'houlenn c'hoaz, war ar
marc'had, bean tort evidout. »

C'hanta, ma zonton, ma karit kemer ma zort, ho po
hoc'h arc'hant... Gortozit, setu aman an tort! Digasit d'in
ho choug!

(*Tennan ra e dori. Tonton Jakez, sebezet, a souz*).

JOBIG, *spontet.*

Ar bugel-noz eo va zonton, pe ar viltans mar d'eo gwell
gnac'h; deut kuit!

TONTON JAKEZ

a dec'h kuit 'rôk Bilez, a red war e lerc'h gant an tort.
Où! où! où!

BILEZ

Gwelet ho peus anean o redek kuit 'rôk e arc'hant?...
Me gred eta em eus gounezet anê! Ec'n an da brenan eur
wiskamant neve ha... da zivleupan (zic'hlapazia) eun all!
Kenavo!

BREST
MOULLEREZ RU AR C'HASTEL, 4

1926

